

TEUL

SURENTEZ

« AR REDADEG »

V6

Darempred : <http://ar-redadeg.org> • email : darempred@ar-redadeg.org • Pellgomz : 06 08 64 99 72



1-DRE VRAS

2-AN AMBROUG HA ROLL PEP HINI

3-PIGNAT ER SAMMORELL HA DISKENN ANEZHI

4-TREMEN E KÊR

5-MERAÑ AR STROLLADOÙ BUGALE

6-E-MAEZ KÊR

7-SURENTEZ DIOUZH AN NOZ

8-CHEÑCH SKIPAILH / KARR

9-AR SKIPAILH-KREIZ (SKaR, Skipailh Kreiz ar Redadeg)

Darempred : <http://ar-redadeg.org> • email : darempred@ar-redadeg.org • Pellgomz : 06 08 64 99 72



1- DRE VRAS

Ar Redadeg, savet evit mad ar brezhoneg, zo ur gouel poblek hag a gas muioc'h-mui a dud d'e heul war hentoù Breizh.

Mont da goll a rafe ar perzhioù-se, dudies ha livet kaer, ganto spered ar fest, paneve e vez aozet an traoù en un doare pizh ha kempenn, gant ar bras eo an dañjer a-hed ur pennad hent ken hir war an hentoù digor d'ar gweturioù. Gant an doare sirius ha sur ma vez aozet e chomo an abadenn gaer-mañ ivez un digarez hep e bar d'an dud joa, levez ha plijadur ganto, da ziskouez d'an holl ha dre ar sport pegen tomm int ouzh ar brezhoneg.

Graet eo an teul « surentez »-mañ evit bezañ skignet e-touez an holl dud a-youl vat a sikour aozañ ar Redadeg.

Afer an holl eo ar surentez ha dav eo da bep hini, war e dachenn, ober diouzh ma vo doujet dezhi.


Ret-groñs eo delc'her un « devezh ar surentez » evit pep kornad gant an holl dud a gemero perzh e tremnadeg Redadeg, abalamour da gomz eus kement tra a zo el levrig-mañ.

Rankout a ray an holl a roio sikour evit ar surentez kaout pep a c'hwitell hag a jiletenn fluo ganto abalamour dezho da vezañ gwelet mat evel-just (koulz da noz hag e-pad an deiz) hag ivez da vezañ anavezet gant ar re a vo o kemer perzh, ar pezh a zegaso muioc'h a bouez dezho. Gallet e vo skrivañ « Surentez ar Redadeg » war gein ar jiletannoù.

Darempred : <http://ar-redadeg.org> • email : darempred@ar-redadeg.org • Pellgomz : 06 08 64 99 72



2- AN AMBROUG HA ROLL PEP HINI



Tri c'harr a ya d'ober an heuliadeg (2 wetur skañv hag ur sammorell). Ouzhpenn ar re-se ez eus un eil sammorell (karr-tan niv. 4) hag a vo implijet pa ranko ar c'harr-tan ambroug ober pourveziou strilheoul, pa vo cheñchamantoù skipailh pe pa chomo sac'het ar c'harr-tan 2. Gallout a ra an div sammorell bezañ implijet an eil e-plas eben, hag eskemmet e vint bep taol ma vo cheñchet skipailh abalamour da aesaat mont en-dro an traoù. Ur wetur skañv all (niv. 5) a c'hall ivez bezañ implijet gant ar Redadeg hed-ha-hed e ken kaz ma chomfe sac'het an daou garr-tan skañv all a vo en heuliadeg, ha gallout a reor implijout anezhi ma vez ezhomm a-hend-all.

2-1 AR C'HARR-TAN E PENN (niv. 1) digeriñ an heuliadeg

Gant ar c'harr-se e vez digoret ar redadeg, tremen a ra war-dro 5 munut a-raok ar sammorell. Ezhomm a vo 2 zen (d'an nebeutañ) er wetur skañv-se. Ouzhpenn mont da gavout ar reder a gemero ar vazh-test da c'houde ha reiñ an tee-shirtoù, en deus ur roll pouezus ivez evit a sell ouzh ar surentez. Ul letern-tro zo warnañ abalamour da vezañ gwelet mat, ur banell da gemenn un dra evel « DIWALLIT REDADEG WAR-DROAD », hag ur sono zo gantañ ivez. Liammet eo ouzh ar c'hirri all dre walkie-talkie pe pellgomzer hezoug. Mont a ra e c'houleier-etre war elum gantañ dalc'hmat (hag e c'houleier-argoll diouzh an tizh ma'z a). Ret eo d'an dud a zo ennañ, gant forzhig kemennadennoù er sono, sachañ evezh an dud a zo war an hent pe war bord an hent, dezho da c'houzout emañ ar Redadeg evit ar brezhoneg war-nes tremen. E brezhoneg e vo ar c'hemennadennoù, nemet ha traoù mallus a vefe da lavaret a-fet surentez.

Darempred : <http://ar-redadeg.org> • email : darempred@ar-redadeg.org • Pellgomz : 06 08 64 99 72



Rankout a reont ivez, ma vez bugale, ober diouzh ma vo trawalc'h a dud vras e-touez ar sternerien, ha diouzh ma vo graet war-dro ar vugale a baouezfe da redek a-raok fin ar pennad hent e oant sañset d'ober. Ma vez strolladoù bugale o c'hortoz war bord an hent eo ret dezho en lavaret d'an heuliadeg.

2-2 AR C'HARR-TAN PENNAÑ (niv. 2) klozadur an heuliadeg

Tremen a ra ar c'harr-se, ur seurt sammorell anezhañ, diouzhtu a-raok ar rederien. Gantañ dreist-holl e vez diwallet ar re-se diouzh ar c'hirri a zeu a-dal dezho. Abalamour d'ar surentez, evel-just, eo ret dezhañ bezañ gwelet eus ar gwellañ.

Warnañ ez eus leternioù-tro, pegsunioù ha bruderezh, ha gantañ ur sono greñv ha luc'hvannerien evit sklêrijennañ ar rederien e-pad an noz.

(Rankout a ra e c'houleier-etre hag e c'houleier-argoll bezañ war elum gantañ dalc'hmat. E-pad an noz e c'hall kaout gouleier all ouzhpenn.)

Ret eo d'an hini a zo ar vazh-test gantañ bezañ 10 metr d'an nebeutañ (5 metr da noz) a-dreñv ar c'harr abalamour da vezañ gwelet mat gant an arvesterien ha kuit dezhañ d'analañ gaz ar pod-skarzhañ. Pouezus eo delc'her d'an hed-se, da dud ar skipailh da c'hallout mont er sammorell pe dont e-maez anezhi en un doare aes, ha dreist-holl betek-gouzout e rankfe ar sammorell stardañ a-daol-trumm. Ma ne vez ket doujet d'ar reolenn-se e ranko an animatour degas da soñj anezhi.

Ret eo d'ar rederien all a zo da-heul bezañ ivez war-dro 5 metr a-dreñv an hini a zo ar vazh-test gantañ, dezhañ da vezañ gwelet mat ha kuit da ziaezañ pa vezer o reiñ ar vazh-test an eil d'egile. Pa vez kalz a rederien, hag ivez an aliesañ ma c'haller ober abalamour m'eo un dra vat evit ar surentez, e vez dispaket ur giton dirazo d'o heñchañ hag ur seizenn a-gleiz dezho, kuit dezho da vont en tu all eus an hent.

2 zen a rank bezañ er sammorell, en tu a-raok. An treizhad a sikour ar bleiner da zalc'her d'ar pezh a zo bet termenet : tizh, hent (GPS, Road-book), eurioù ha kement zo, asambles gant an dud all er skipailh e tu a-dreñv ar sammorell hag er c'hirri all (e darempred emaint dre walkie-talkie ha dre bellgomzer hezoug).

2 zen zo karget, en tu a-dreñv, eus ar c'hemennadennoù er mikro hag eus ar sono. Gant ar c'hemennadennoù e tegaser da soñj d'an dud eus ar reolennoù a-fet surentez pa ne vez ket doujet dezho pe pa vez ezhomm diouzh an degouezh :

-doujañ d'an hedoù

-dav d'an hini a zo ar vazh-test gantañ chom dirak ar rederien all

-ret-groñs eo d'ar rederien chom a-dreñv ar sammorell ha war ar memes tu eus an hent (dreist-holl e kêr, pa 'z eer difounnoc'h, pa vez stank ar mont-dont war an hent, pa vez kalz a dud o kemer perzh)

-goulenn digant ar vugale n'eus oadour ebet ken ganto ha digant ar rederien a chom re bell war-lerc'h an heuliadeg ha ne vezer ket ken evit ober war o zro a-fet surentez, chom a-sav war ribl an hent.

2 pe 3 den er skipailh (rederien ampart anezho), pep a c'hwitell hag a jiletenn fluo ganto, zo karget da redek lec'h n'eus ket kaset den ebet a-berzh ar re o deus prenet kilometroù digant ar Redadeg, da zegas dour d'ar rederien ma vez ezhomm, da sikour lakaat doujañ d'ar reolennoù ha da zispakañ ar giton hag ar seizenn.

Darempred : <http://ar-redadeg.org> • email : darempred@ar-redadeg.org • Pellgomz : 06 08 64 99 72



2-3 KARR-TAN MEZEGEL (niv. 3) klozadur an heuliadeg

2 zen a rank bezañ er c'harr skañv-se. Unan anezho zo mezeg, klañvdiour, pe gantañ un diplom sikourer d'an nebeutañ.

Un drouseñ brederiañ hag un digrehader zo ganto en o c'herz. Bez' ez eus un eil digrehader er c'harr a zo dirak ar rederien. Ret eo dezho bezañ lennet ha kaout ganto al levrig « AOZADUR AR REDADEG A-FET YEC'HEDOURIEZH » a zo warnañ an holl gemenoù e-keñver yec'hedouriezh. Ret eo dezho kaout ganto ivez an « DEIZLEVR » a vez merket warnañ kement tra a c'hoarvez hag evezhiadennoù ma vez ezhomm.

Bras a-walc'h eo ar c'harr-se evit degemer 2 pe 3 den erru skuizh. Splann eo d'an holl ez eo ur c'harr mezegel peogwir ez eus lakaet warnañ ur meneg evel « yec'hed » pe « mezeg ». A-dreñv ar c'harr ez eus ivez ur banell merket « REDADEG WAR DROAD » warni evit ar surentez. Ennañ e vez dastumet an dud gloazet ma vez anezho, prederiet e vez outo ha neuze e vez graet war-dro diboullañ anezho ma vez ezhomm.

Gallout a ra ivez ambroug ur bugel « dilezet war an hent » betek un den bras ma ne vez ket dibres ar c'harr Skar (niv. 4).

Gantañ ez eus ul letern-tro ha bonnoù balizennañ abalamour da suraat an takad ma vo ezhomm d'emellout, kuit da vezañ kaoz d'ur gwallzarvoud.

Rankout a ra an dud a zo ennañ anaout mat an hent hag an eurioù a zo bet termenet (gant sikour ur Road-book) abalamour da lavaret resis pelec'h emañ ma vez ezhomm da c'helver ar SEMEP (15) pe ar bomperien (18) eus un tu, hag ivez da c'houzout pelec'h adkavout an heuliadeg m'o devez ranket kuitaat anezhi.

E darempred emañ gant ar c'hirri all dre walkie-talkie pe dre bellgomzer hezoug ha ret eo d'e c'houleier-etre bezañ war elum gantañ dalc'hmat (hag e c'houleier-argoll diouzh an tizh ma'z a, nemet pa vez o cheñch hent).

2-4 TRAOÙ OUZHPENN

Ouzhpenn ar stignad a zo bet displeget uheloc'h eo ret kaout trawalc'h a zivrodegoù (beloioù, skouterioù pe motoioù) hag a ra war-dro ar surentez e diabarzh an ambroug hag ivez renkañ ar pezh a sell ouzh distremen el lec'hioù ma c'haller en ober. War-lerc'h ar redadegoù aozet er bloavezhioù a-raok e ouzer e kerzh mat an traoù gant ur skipailh ennañ 4 marc'houarner + un divrodeg dre geflusker.

Graet eo ar beloioù, da gentañ-penn, evit ober war-dro surentez ar rederien a-dost. En em lakaat a ra ar varc'houarnerien war-lerc'h ar rederien hag a-gleiz dezho. Lakaat a reont an tremenerezh da chom a-sav er c'hroashentoù lec'h m'en em gav ar sammorell. Renkañ a reont ar pezh a sell ouzh an distremen. Ouzhpenn ur jiletenn fluo eo ret d'ar varc'houarnerien kaout pep a dokarn war o fenn. Ur c'hwitell a rankont kaout ganto ivez, dezho da vezañ klevet gant ar vleinerien gweturioù hag ar rederienn abalamour d'an trouz a vo en-dro d'an ambroug.

Dav e vo komz eus ar pezh a sell ouzh an distremen da-geñver an devezh war ar surentez.

Ober a ra ar moto (pe ar skouter bras) war-dro ar surentez war ar pennad hent a zo etre ar sammorell hag ar c'harr skañv er penn. Gouest eo d'ober al liamm buan-ha-buan etre an daou garr-se ma vez ezhomm.

Darempred : <http://ar-redadeg.org> • email : darempred@ar-redadeg.org • Pellgomz : 06 08 64 99 72



Sikour a ra da renkañ ar pezh a sell ouzh an distremen, da lakaat an tremenezh da chom a-sav er c'hroashentoù, hag ober a ra sin d'ar c'hirri a zeu eus an tu enep da vont difounnoc'h. Abalamour d'an nozadurioù a c'hall bezañ evit ar rederien (trouzh ha gaz skarzhet) e rank chom dirak ar sammorell.

3- PIGNAT ER SAMMORELL HA DISKENN ANEZHI

Abalamour ma vezer en arvar da gouezhañ pa bigner er sammorell pe pa ziskenner anezhi ha hi o ruilhañ, eo ret en ober an nebeutañ ma c'haller.

-N'eus nemet an dud aotreet a c'hall pignat e-barzh

-Ret eo da dud ar skipailh teknikel pleustriñ war se (devezh surentez)

-Gallout a ra ar sammorell mon difounnoc'h evit aesaat an traoù

-Pa vez ezhomm da cheñch bleiner, da gargañ traoù pe evit abegoù all, e c'hall ar sammorell kemer meur a gant metr lañs war an ambroug evit chom a-sav en ul lec'h sur (mont a ra ar Redadeg 500m war-raok en ur ober 3mn). Gant ma vo graet diouzh ma vo lakaet mat ar rederien war wel (divrodegou dirazo an eil war-lerc'h egile).

Ha pa c'haller pignat hep re a boan, ez eo risklus diskenn ha diwar se e vez gloazet tud bep bloaz. Soñjal a ra d'an dud e c'haller lammat a-dal d'an hent, met abalamour d'an tizh, goude ma'z afe goustadik ar sammorell (ha dre-se ken goustadik all an den a zo o lammat), e kouezher war-dreñv bep taol kerkent ha ma toucher d'an douar. Ne vez ket an den o c'hortoz se ha gallout a ra e benn stokañ rust ouzh an hent.

PENAOB OBER :

-PIGNAT : Ret-groñs eo tapout krog mat en unan eus ar senklennoù a zo lakaet ouzh ar sammorell a bep tu d'an nor a-dreñv, sikour a ra d'ober mat an traoù. Dav delc'her da redek ha neuze bountañ war grec'h gant nerzh ho troad en ur sachañ war ar senklenn evit pignat er c'harr.

-DISKENN : Ret-groñs eo diskenn a-souz ! Tapit krog en unan eus ar senklennoù ha troit kein d'an hent. Kerkent ma touch ho troad d'an douar eo ret deoc'h en em lakaat da redek ANEZ DISKREGIÑ DIOUZH AR SENKLENN ! Ganti e c'hallit en em lakaat en ho reizh en-dro ma tegouezh ganeoc'h koll ho kempouez ! 2 pe 3 stampad zo trawalc'h evit koazhañ an tizh inertiezh. Ur wech m'oc'h krog da redek ken buan hag ar sammorell ha plom en ho sav adarre, diskrogit diouzh ar senklenn ha lezit ar sammorell da gemer lañs warnoc'h.

4- TREMEN E KÊR

Evit ar pezh a sell ouzh tremen er c'hêrioù bihan ez eo gwell mont e darempred gant servijoù ar gumun evit suraat amañ pe ahont ur c'hroashent bennak, ur c'hroashent-tro, pe kement lec'h hag a c'hallfe bezañ dañjerus.

Evit ar pezh a sell ouzh treuziñ ar c'hêrioù bras pe etre ez eo ret a-raok mont e darempred gant servijoù ar polis (polis broadel pe polis-kêr) ha servijoù ar gumun (servij an hentoù, diouzh al lec'hioù) evit lavaret dezho e tremeno ar Redadeg, displegañ dezho penaos ez ay en-dro (ne chomer ket a-sav e-tal ar gouleier triliy, er c'hroashentoù, er stopoù), penaos eo ar stignad surentez (kirri, beloioù, skipailhoù tud...), dre belec'h e tremeno resis hag ivez evit goulenn sikour diganto a-hed an hentad.

Darempred : <http://ar-redadeg.org> • email : darempred@ar-redadeg.org • Pellgomz : 06 08 64 99 72



Ma vez nac'het gant ar polis kemer perzh ez eo gwell neuze lakaat, ouzhpenn an divrodegou, ur c'harr all warnañ ul letern-tro, war-dro 50 m dirak ar sammorell abalamour da zigeriñ an hent dezhi, kuit dezhi da chom sac'het pe da vont difounnoc'h. Gallout a ra ar c'harr-se bezañ an eil sammorell (Skar) a zo graet a-ratozh evit se ivez.

Diouzh niver an dud e vezer o c'hortoz, an eur ma vezer sañset da dremen er gêr, stankter an tremenerezh, e c'hall an dud a zo e karg eus ar pennad hent-se bezañ rediet, evit ur frapad amzer, da lakaat muioc'h a dud da gemer perzh er skipailh (rederien war droad pep a jiletenn fluo ganto). Aesoc'h e vo dezho, eget d'an dud war velo a c'hall chom sac'het a-dreñv ar rederien, ober war-dro ar surentez ha heñchañ ar rederien, dougen ar giton hag ar seizenn surentez.

Ret eo ober gant ar giton kerkent ma c'haller. Bez' ez eus 2 pe 3 skouerenn anezhañ hag a zo disheñvel o ment, da vezañ implijet diouzh ledander an hent. Ouzhpenn bezañ brav da welet e vez implijet evit delc'her ar rederien war an tu mat ha distagañ an hini a zo ar vazh-test gantañ diouzh an dud all.

Rankout a reer ober gant ar seizenn surentez ivez adal ma'z eer war un hent ha n'eo ket untu kuit d'ar Redadeg da vont war an tu kleiz.

Arabat stagañ ar seizenn ouzh ar samorell avat rak gallout a rafe degas riskloù ouzhpenn, ha ret eo diwall d'ober gant seizennoù re hir hag a c'hallfe, ma vezont implijet fall, lakaat tud zo da gouezhañ.

5- MERAÑ AR STROLLADOÙ BUGALE

Ret-groñs eo d'ar vugale a gemer perzh er Redadeg bezañ ambrouget gant tud vras hag a zo karget anezho.

Rankout a ra an aozerien gouzout resis pelec'h emañ ar c'hilometroù ma vo bugale o redek.

Graet e vo dre ret gant ar stignad « giton-seizenn » a zo displeget uheloc'h.

5-1 AR RE VIHANAÑ BETEK AR CM1

Diaes-tre eo lakaat anezho da redek asambles a-stampoù bihan. Techet int da dremen diehan an eil hebiou egile abalamour da vezañ er penn a-raok. Ankouaat a reont emaint war an hent, lec'h ma vez gweturioù war o lerc'h pe o tont eus an tu all. Muioc'h a riskloù a vez da gouezhañ. N'ouzont ket muzuliañ o strivoù ha gant se e c'hallont bezañ dilañset buan pe chom a-sav a-daol-trumm.

-Ret eo termeniñ resis, en a-raok, ar pennad hent ma vint o redek, hag arabat eo dezho mont pelloc'h eget ar pezh a zo bet divizet.

-Ret eo bezañ sur ma vo a-walc'h a dud vras da ziwall ar vugale (darn eus o zud, skolaerien, kasourien...)

-An dud vras a zo karget d'o diwall a rank chom ganto.

-Ma vez ur bugel o chom a-sav e vo arabat lezel anezhañ e-unan war bord an hent, e mod ebet.

-Ma c'hoarvez d'unan eus an dud vras-se chom a-sav e rank ar vugale emañ-eñ e karg anezho chom a-sav ivez.

5-2 AR RE VRASAÑ

Darempred : <http://ar-redadeg.org> • email : darempred@ar-redadeg.org • Pellgomz : 06 08 64 99 72



Kalz barrekoc'h int da zalc'her an taol he techet e vefent da zalc'her da redek ha pa ne vefe den bras ebet d'o ambroug.

-Degas da soñj eus ar c'hemennoù surentez gant sono ar sammorell ha goulenn digant ar vugale chom a-sav adal na vezont ket ambrouget ken.

-Arabat lezel ur bugel e-unan war an hent, ret eo kas ur marc'houarnner, ar c'harr Skar (pa vezer pell eus ar c'hêrioù) pe, ma ne c'haller ket ober mod-all, ar c'harr mezegel d'e ambroug betek un den bras a vo e karg anezhañ.

6- E-MAEZ KÊR

Ar re a zo karget eus ur pennad hent a rank diskoachañ al lec'hioù resis a c'hall bezañ dañjerus ha reiñ keloù da dud ar skipailh diwar-benn kement-se.

Dav eo reiñ keloù ivez d'an archerdioù a zo ar pennadoù hent risklus-se e-barzh o zachad, ha goulenn sikour diganto zoken.

Ar c'hroashentoù-tro daou roud, ar c'hroashentoù lec'h m'eo stank an tremenezh, hag an hentoù-tizh a ranker sellet anezho e-giz lec'hioù dañjerus, gant se eo ret lakaat enno trawalc'h a dud hag a banelloù diouzh an ezhom. Gallout a reer goulenn sikour digant servijoù ar c'humunioù lec'h ma tremener. Dre vras eo ret delc'her kont ar gwellañ ma c'haller eus kement hag a sell ouzh ar surentez pa vezer o tresañ hent ar Redadeg.

Ha pa vez aesoc'h peurluviañ heñchañ ar rederien war ar maez eget e kêr abalamour na vezont ket ken niverus, e vez brasoc'h ar riskloù abalamour ma'z a buanoc'h ar c'hirri war an hentoù-se.

Evit en em gavout e-barzh ar Redadeg pe, dreist-holl, evit mont er-maez anezhi, e tegouezh d'an dud treuziñ an tu kleiz eus an hent hep diwall (diwar ar skuizhder, ar birvilh). **Ret eo, gant ar sono, degas da soñj eus ar c'hemennoù d'ar rederien en un doare ingal evit mirout outo da vont war an tu kleiz eus an hent, ha lavaret dezho (c'hwitelloù) pa vo kirri o tibaseal ar Redadeg pe o kroazañ anezhi.**


6-1 KROASHENTOÙ-TRO

Ur roud

Daou roud

Darempred : <http://ar-redadeg.org> • email : darempred@ar-redadeg.org • Pellgomz : 06 08 64 99 72






Er c'hroashentoù-tro bras daou roud enno e c'haller harzañ an tremen war ar roud diavaez, diwar se e c'hall ar c'hirri all tremen hebiou ar Redadeg dre ar roud diabarzh. Da neuze e vo skipailherien a-gleiz d'ar rederien. Forzh pe zoare ma vo an traoù eo ret da vleiner ar sammorell chom ar muiañ ma c'hall war an tu dehou, ha pa vefe o tont er-maez goude bezañ graet an tri-c'hard eus tro ar c'hroashent, evel war ar skeudenn.

Ur wech ma vezer krog d'ober tro ar c'hroashent eo kod an hentoù a dalvez, daoust da se eo gwell lakaat skipailherien lec'h ma rank an dud all lezel ar Redadeg da dremen, kement ha bezañ sur e vo doujet d'ar reolennoù. Bleinerien zo, pa welont ned aint ket ken founnus abalamour d'an heuliadeg, en em laka dirak ar c'harr mezegel pe etre ar rederien zoken, ma vez un tamm plas etrezo, e-giz-se e troc'hont an ambroug etre daou.

6-2 TREIÑ A-GLEIZ



Dav eo d'ur skipailher (un divrodeg, ur moto kentoc'h) en em lakaat kalz a-raok ar c'hroashent evit lakaat ar c'hirri a zeu eus an tu all da vont goustadikoc'h.

Skipailherien all a rank lakaat ar c'hirri-se da chom a-sav a-raok ar c'hroashent e-keit m'en am laka skipailherien all c'hoazh a-gleiz d'an ambroug evit mirout ouzh kirri hag a zeu eus an tu a-dreñv da dremen hebiou.

Darempred : <http://ar-redadeg.org> • email : darempred@ar-redadeg.org • Pellgomz : 06 08 64 99 72



6-3 MERAÑ AN DISTREMEN

Hervez ar reolenn diazez e rank bleiner ar sammorell klask en em lakaat atav ar muiañ ma c'hall war an tu kleiz, gallout a ra mont war ar ribloù-hent pa vezont kempennet ha war ar roudennoù divrodegou. Gant se e vez gwelloc'h an hed-gwel hag aesoc'h e vez d'ar c'hirri a zeu a-ziadrenv ar Redadeg tremen hebiou dezhi.

Pa vez kalz a girri war-lerc'h ar Redadeg eo dav implijout kement pennad hent keñver-ha-keñver pe dilezet, pe kement kroashent a vez kavet, abalamour da lezel ar c'hirri-se da dremen hebiou (ha pa rankfed chom a-sav ur frapadig !), Paneve se e c'hall ar vleinerien koll pasianted ha distremen lec'h m'eo dañjerus.

Ne vez roet da c'houzout gant ar skipailh e c'hall ar c'hirri all tremen hebiou ar Redadeg nemet pa vezer sur, hep mar ebet, n'eus dañjer ebet. Anez da se eo gwell chom hep en ober. Ma vez ur stokadenn bennak eo ar skipailh a vo kiriek.

Ret eo da dud ar skipailh bezañ stummet war an doare d'ober kement-se ha rankout a ra an holl kaout pep a gefridi resis d'ober.

Alies, diouzh an degouezhioù, ne vez ket trawalc'h gant ar sinaloù gwelet ha ret e vez d'ar skipailherien bezañ e darempred an eil gant egile dre walkies-talkies.

An divrodegou eo ar re a glot ar gwellañ evit kas embregadennoù seurt-se da benn. Dav d'ar varc'hhouarnerien reiñ taolioù c'hwitell pa vez kirri o tistremen, da reiñ da c'houzout d'ar rederien ha da dout ar skipailh.

7- SURENTEZ DIOUZH AN NOZ

Ouzhpenn ober gant an ostilhoù a ranker kaout war an deiz eo ret d'ar skipailherien bezañ gwelet diouzh ar gwellañ gant traoù evel :

- Pep a lamp ouzh o zal.
- Brec'henoù luc'hus pe Flash-lights stroboskopek.
- Gouleier ouzh tu a-dreñv ar beloioù.

Peogwir eo skoempoc'h merañ an distremen diouzh an noz eo furoc'h lezel ar c'hirri a zeu da-heul ar Redadeg d'ober an traoù diouzh o mod.

Dav aesaat an traoù dezho :

- Ober an ambroug ar berrañ ma c'haller. Chom hep lezel toullou etre ar rederien.
- Ret eo d'ar c'harr mezegel chom tost a-walc'h ouzh ar rederien, kuit d'ur c'harr all d'en em lakaat etrezo. Ouzhpenn-se e vez dallet ar vleinerien a-wechoù gant al luc'hvannerien a zo ouzh tu a-dreñv ar sammorell, diwar se ne welont ket mat ar rederien. Gant gouleier-etre ar c'harr mezegel e vez sklêrijennet mat ar rederien.
- Rankout a ra bleiner ar sammorell merañ ar gouleier diouzh ar gwellañ ha lakaat anezho war grec'h pa ne vez karr ebet dirazañ abalamour da sklêrijennañ an hent evel zo dleet.**

8- CHEÑCH SKIPAILH / KARR

Darempred : <http://ar-redadeg.org> • email : darempred@ar-redadeg.org • Pellgomz : 06 08 64 99 72



Ret eo ober ar cheñchamantoù e lec'hioù suraet hag a rank bezañ frank a-walc'h d'ar skipailh d'ober ar cheñchamantoù en un doare distenn hag efedus. Ret eo d'an daou skipailh a zo o vont d'ober an eskemm anaout mat-tre al lec'h a zo bet dibabet.

Ar memes ostilhoù rik a gaver gant an 2 sammorell er Redadeg, gallout a reer ober gant an eil e-plas eben. Gant se n'eo ket dav lakaat an ambroug da chom a-sav pa vez cheñchet takad.

Skipailh-kreiz ar Redadeg (Skar) a ginnig an eil sammorell (niv. 4) da skipailh an takad a vo da-heul, en ul lec'h emgav bet divizet en a-raok, un ½ eur d'an nebeutañ a-raok ma vo o zro da gemer penn an traoù. E-giz-se e c'hall skipailh an takad kustumiñ ouzh an doare ma vez bleinet ar sammorell, an doare ma kerzh ar sono hag an ostilhoù a zo e bourzh, ha degaset e vez buan-ha-buan da soñj d'an dud eus ar reolennoù surentez.

Ret eo da skipailhoù ar c'harr a zo e penn (amzer zo evit se) hag ar c'harr mezegel (dav eo delc'her kont eus an amzer a zo ezhomm) klevet ivez ar c'hemennoù-se.

9- AR SKIPAILH-KREIZ (SKaR, Skipailh Kreiz ar Redadeg)

9 pe 12 den a ya d'ober ar SKaR, rannet etre 3 pe 4 skipailh hag a heuilh ar Redadeg a-bep-eil a-hed an hent.

Pep a garr-kampiñ pe a garr skañv zo gant ar skipailhoù (lojet e vezont e ti an dud pa vez deuet ar mare dezho da ziskuizhañ).

Graet eo ar SKaR evit sikour ar skipailhoù lec'hel :

-Kinnig an eil sammorell (war-lerc'h bezañ leuniet ar veol gant gazeoul) d'ar skipailh a zo o vont da gemer penn ar Redadeg ½ eur a-raok ar mare ma vezer sañset d'ober ar cheñchamant. Kinnig an ostilhoù a zo e bourzh, ar mod d'implijout ar sono, ar gouleier, ar GPS, walkies-talkies ha kement zo.

-Gwiriañ, evit pep karr, emañ ar Road-Book ganto hag enno tud hag a anavez mat an hent.

-Degas da soñj eus ar reolennoù surentez hag eus perzh pep hini en ambroug (lakaat pep a jiletenn surentez, c'hwitelloù, traoù lufrus evit an noz, niverennoù pellgomz...)

-Kemer ar sammorell gentañ digant ar skipailh lec'hel a zo oc'h echuiñ gant e vared e penn an traoù. Gwiriañ ha mont a ra an ostilhoù en-dro.

-Lakaat ur c'harr all e-plas ar c'harr a zo e penn pe ar c'harr mezegel, amzer da adlakaat gazeoul enno pe ma vezont sac'het.

-Ma vez ezhomm, pourchas dour, jilettennoù, seizennoù, ostilhoù hag a zo diouer anezho...

-Kreñvaat ar stignad surentez pa vezer o tremen e lec'hioù dañjerus, e kêr, pa vez bugale pe kalz a dud o kemer perzh.

-Dastum ar vugale a zo chomet war ribl an hent ha klask war-lerc'h o zud pe ar re a ra war o zro.

-Skoazell ma tegouezh un dra bennaket a-dreuz (gwallzarvoud, chom sac'het, darempredoù gant an nerzhioù urzh...)

Darempred : <http://ar-redadeg.org> • email : darempred@ar-redadeg.org • Pellgomz : 06 08 64 99 72



Darempred : <http://ar-redadeg.org> • email : darempred@ar-redadeg.org • Pellgomz : 06 08 64 99 72



Ar Redadeg - BP 15 - 35310 Morzhell / Mordelles